



Kantik Intron Varia ar Reun

GUIP AVAS



DISKAN :

Mirit ho pugale,
 O Guerc'hez ar Reun,
 Grit d'eomp bepred bale
 En hent guirion eùn.
 Klevit or pedennou,
 O Guerc'hez ar Reun,
 C'hui, euz ann holl graçou,
 A zo ar feunteun.

I

Chapell ar Reun, o mamm garet,
 Kentoc'h savet 'tal eur c'hastel,
 Diskaret epad ar vrezel,
 Buhan zo bet 'nevez savet.

II

Hag evel hon tadou guechall
 Ho goad 'tro d'ezhi 'n'euz skuillet,
 'N'on amzer ivez, d'he diouall,
 Guipavas, zo bet diredet.

III

O Mari, mamm a drugare,
 Holl ho karomp, Guipavasis,
 Grit ni ho ped, en han' Doue,
 Mar talc'himp stard bepred d'or feiz.

IV

Testeni euz ho karantez
 Stag euz mogerioù ho chapell
 D'an holl a lavar, o Guerc'hez,
 D'eomp-ni e Lourd, roñt skoazell.

V

O Guerc'hez ar Reun, o Mari,
 Var ho pugale Guipavas
 Varnomp holl deuet d'ho pedi,
 Ni ho ped, taolit eur zell, c'hoas.

VI

Daoulinet holl en ho chapell
 Hon tadou koz 'n'euz ho pedet

'Veld'ho, mamm garet Breiz-Izel
 D'eoc'h ni vezo fidel bepred.

VII

Hag euruz goude ar maro
 Ni holl ho pugale, Mari,
 Ganeoc'h en Env ni a gano
 Da Jesus, bennoz, meuleudi.

L. C.

IMPRIMATUR

A. GADON,
 V. G.

Lambézellec, die 25 Januarii 1908.